

I

A-raok erruout e Sant-Ke ez eas Garan Dreveur, ur paotr yaouank a bemp bloaz warn-ugent, diwar an hent bras da gemer an hent-karr a gase war-du Balaneier. E varc'h a lezas da gerzhout a-zoug e gamm.

Brav e oa an endervezh. Daoust m'edod en ugentvet deiz miz Here e oa klouar, ur marzh, an aer. An heol, kollet gantañ gwrez an hañv, a skede c'hoazh, gwennoc'h e lagad eget kent, hogen plijus ha madelezhus. Glas e oa bepred delioù an derv hag an haleg. Ar raden, krog da zisec'hañ, a rae ur gribennad blev gell-ruz d'ar c'hleuzioù uhel.

Hep dale en em zispakas, en tu-all d'ur valaneg vras, an torkad gwez-tilh hag ar c'hoadig efl hanter-zizeliet, a wareze tiez Balaneier. Bez' e oa anezho un doare maner paour savet ul lodenn anezhañ e mein-benerezh hag al lodenn all e mein-pastur. Stag ouzh an ti, war ur regenn gantañ, er penn nesañ d'an hent, ur marchosi hag er penn all, krevier. Pelloc'hik war-du reter ar porzh, an ti-stern, un tregont kammed bennak diouzh an ti-annez.

Da welout mestr an ti-stern end-eeun eo edo Garan o vonet. C'hoant en devoa da c'houzout ha prest e oa al lien-lin en devoa goulennet digant ar gwiader ober evit ar stal a zalc'he gant e dad e Montroulez. Ergerzhout a rae ar vro evel-se evit gwerzhañ danvezioù a bep seurt degaset dre vor eus Italia pe eus Spagn hag evit lakaat gweañ lien-lin gant gwiaderien ar c'hontre. Gwerzhet e veze al lien-se er c'hêrioù ha zoken kaset d'an estrenvro.

Pan erruas er porzh e tiskennas diwar e varc'h hag e stagas rañjenn e loen ouzh un organell dalc'het gant un tach-krog sanket en ur juntr er voger, izeloc'hik eget prenestr ar marchosi. Hag eñ war-du an ti-stern. Digor e oa an nor. Moarvat ne oa ket bet klevet o tonet : stlakal ingal a rae tik-tak ar stern-gwiader eilet gant ur safar mouezhioù drant. Gwech-hag-amzer e tregerne c'hoarzhadenn sklaer ur plac'h. Ur wetur skañv a oa ivez er porzh, sterniet outi ur marc'h a wad.

« Un itron bennak diwar-dro, » a soñjas raktal.
« Emañ ar gwiader o kontañ ur fentigell bennak dezhi evel kustum. »

En entremar edo. Pe ez aje e-barzh pe e c'hortozje ken na vije an itron-se o vonet a-raok, ne ouie petra da ober. Gedal a reas ur pennad, hogen kenderc'hel a rae ar gaoz koulz ha tik-tak ar stern da voudal.

« N'ouzont ket emañ amañ, » emezañ outañ e-unan. « Pe e vin kavet diseven pe ne vin, monet a ran e-barzh ! »

War an treuzoù ez ehanas mik o welout div blac'h yaouank en o sav e-kichen ar mestr-gwiader, Koneri ar Merer. Hemañ, ur paotr e-tro hanter-kant vloaz, ur chupenn divilgin gantañ war e roched, a oa o kas hag o tegas ar feur dirazañ bep gwech ma taole e vulzunoù-beuz da steuiñ ha da anweiñ.

« Demat d'an holl, » eme C'haran en ur dennañ e dog hag en ur stouiñ dirak an div blac'h yaouank.

Kerkent e paouezas an tik-tak en ti-stern. Hemañ ne oa ket bras, anezhañ netra nemet ur pezh hepken en traoñ, war-dro ugent troatad hed ha pemzek troatad led ha, war-laez, ur solier gant ur skeul da bignat dezhi. Korf ar stern a garge an darn vrasañ eus an traoñ. Ar brid-stern hag ar c'houlouer a oa a-vec'h un troatad izeloc'h eget an terest. Sklêrijennet e oa ar pezh gant ur prenestr a daole war ar porzh, tost ouzh an nor. A-dreñv kein ar gwiader, e tu an norzh, ur siminal mein-benerezh a ziskoueze e dor duet gant ar moged.

En oaled edo o teviñ un tan brav dindan ur gaoteriad boued-loened, pezh a lakaas Garan da gounaat ar rimadell a zibune da Goneri evit en hegañ :

*« Ar gwiader war e stern
Evel an diaoul en ifern
Oc'h ober tik-tak, tik-tak
O tennañ hag o lakaat ».*

Diwar ar sell kentañ e ouezas en em gave dirazañ un dimezell a diegezh mat hag he matezh. Ken

yaouank ha ken yaouank o-div. Brozh ha korfenn satin glas an dimezell a oa stummet-brav diouzh he c'horf mistr. Gant he c'holinetenn dantelez ha gant he boned e satin glas ivez, bevennet a lien-moan kuilhet hag a leze da gouezhañ rodelladennoù blev gell-kistin war ar chal seiz bihan gwenn a c'holoe he divskoaz, e oa doare un itron warnezhi.

Garan a welas he daoulagad glas evel ar bleuñv-lin o parañ warnezhañ ur pennadig.

« Sell piv ivez 'ta ! » eme Goneri. « Penaos emañ ar bed ganeoc'h, Aotrou Garan ? »

« Ha c'hwi, Koneri ? Penaos e rit ? »

« Mat, mat-tre ! Dres edon o komz diwar ho penn gant an dimezell. »

« Evel-se enta, ez on digarez da gaoz ! »

« Petra emao'h o soñjal ! »

« Mar boa ar gaoz diwar va fenn e oa fentus, a gredan, paneogwir e kleven c'hoarzhadeg ? »

« Emaoc'h ganin, Aotrou Garan ! Nann, mar komzen diwar ho penn bremaik gant an dimezell... Met n'anavezit ket anezhi, sur a-walc'h ! An dimezell Gwenn ar Madeg a Dremelven eo hag he servijerez, Yona ar Floc'h, va nizez eus Krec'h-Kile. »

Stouiñ a reas Garan adarre d'o demata.

« Dimezell Gwenn, hemañ eo an Aotrou Garan d-Trevez, o veajiñ evit ar stal-genwerzh emañ o terc'hel gant e dad. »

« Enoret on ouzh hoc'h anavezout, Aotrou Trevez, » eme Wenn en ur astenn he dorn dezhañ.

En kemer a reas ar paotr yaouank hag e pokas seven d'he c'hildorn.

« Gwashat ma plij din, » a daolas Koneri o farsal hervez e gustum, « gizioù an dudjentil seven ! »

« *Sonit 'ta, sonerien, ha mirit ar gadañs,* »
« *Emañ mab an aotrou o vonet 'barzh an dañs !* »

« Sellit ! Kavout a ra din emaon e kastell ar C'hru-guilh en un nozvezh-koroll ha n'eo ket en un toull-tistern evel hemañ ! » C'hoarzhin a rejont o-fevar.

« Salv resped, Aotrou Garan, va zro e oa da hegañ, » en em zigarezas Koneri.

« Deuet e oan, » a zisplegas Gwenn a Dremelven da welout e pelec'h edo erru Koneri gant ar wiadenn am eus goulennet digantañ ober din. »

« Evit an hevelep abeg emaon-me amañ ! »

« Lavaret en deus din avat e ranken gortoz ken na vije peure'hraet al labour edo oc'h ober evit ur marc'hadour a Vontroulez. »

« Ho tigarez ! Dirazoc'h emañ ar marc'hadour-se a Vontroulez ! » eme C'haran Dreveur, « hag eñ keziet. »

« Ne virin ket greunenn ouzhoc'h evit ken dister dra ! »

« Mar em bije gouezet avat e c'halljen bezañ ho tiaezet, em bije lavaret da Goneri goursezañ gant e labour evidon. »

Monet a reas ar gwiader war ar gaoz : « An dimezell a Dremelven ne c'hortozo ket pell ken.

Meur a walennad a zo a-benn bremañ war garvan al lien. N'hoc'h eus ken nemet sellout ha diouzh ho toare eo va gwiad. A-benn ar sizhun gentañ e vezo echu. »

Monet a reas Garan da verat, gant begoù e vizied, an danvez nevez-weet, etre karvan al lien hag ar c'hanweioù.

« Fiziañs am eus ennoc'h, Koneri, » eme Wenn. « Gouzout a ran ez oc'h den d'ho ker. Ho lezel a ran ho-taou gant ho marc'hadoù, met donet a rin endro a-benn eizhtez. »

Kimiadiñ a reas diouto. Garan ha Koneri a sellas outi o treuziñ ar porzh, he matezh ouzh hec'h heul.

« Ur plac'h ouesk hag a vent vat, » a soñjas ar paotr yaouank.

E zaoulagad n'ejont ket diwarnezhi ken na voent pignet o-div en o gwetur hag aet diwar wel e karrhent Balaneier. Teurel evezh a reas Koneri e oa dedennet Garan gant kened an dimezell a Dremelven.

Minc'hoarzhin a reas met ne glaskas ket hegañ rak eñ e-unan a vame outi.

« Ur plac'h a benn eo an dimezell a Dremelven, » emezañ.

« Krediñ a rafen a-walc'h, » a eilgerias Garan.

« N'eus nemeti a blac'h e maner Tremelven. Marvet he mamm pemp bloaz 'zo bremañ, emañ o vevañ eno gant he zad. Hi eo mestrez an ti, d'hec'h ugent vloaz ! »

« Pennherez eo enta ? »

« N'eo ket, sur ! Daou vreur he deus met, evit ar re-se avat, n'int ket brudet kaer. Atav e vezont e-maez ar gêr o kantren dre ar vro war gein o c'hezeg, oc'h ober o roll hag o diroll, o redek ar festoù hag an dañsoù ken lies gwech ha ma vez ha n'eus forzh e pelec'h e vez. »

« Daou labous, mar komprenan mat ! »

« Stefan, an henañ, eo ar gwashañ, a-hervez. Bet eo ur pennad en arme ar roue. Abaoe ma 'z eo distro ac'hano, bloaz 'zo, ez eo gwelloc'h tremen hep kaout stok outañ. »

« Ne soñj ket din, Koneri, em befe tro da gaout stok outañ evel ma livirit, rak n'eus ket ar seurt tud-se e-touez gwizien hon ti, din da c'houzout bepred ! »

« Brav eo deoc'h neuze. Met an dimezell Gwenn hag he zad o deus aluzon o rankout bevañ er memes ti gant daou lankon evel ar re-se ! »

« Ha bremañ, Koneri, mar komzfemp eus hor marc'hadoù ? Deuet ez eus arc'hant ganin da reiñ deoc'h e penn-kont diwar ar gwiad emaoe'h oc'h ober evidon. »

Hag int-i, evel daou vignon, da lakaat o zraoù war o rez. Graet se ganto e chomjont da varvailhat betek an abardaez. Serr-noz a zegouezhas hep gouzout dezho, hgozik.

« Poent eo din monet, » eme C'haran Dreveur a-benn an diwezh.

« Amañ e c'hallfen reiñ ur gwele mat a bluñv deoc'h da dremen an noz. Mar kirit e chomot, » a

ginnigas ar gwiader. « Suroc’h e vo deoc’h e Balaneier eget war hent Lannuon en deñvalijenn. »

« Bennozh-Doue deoc’h, Koneri. Hogen, sklaer eo an oabl hag ur jav mat a zo ganin. »

« Ma ! Evel ma kerot e reot ! »

« A-raok koan e vezin en Ostaleri ar Groaz Wenn e-lec’h ma ran va diskenn bep gwech ma teuan da Lannuon. Kenavo ar c’hentañ gweled ! »

« Doue r’ho tiwallo, Aotrou Garan. Kenavo ! »

Distagañ a reas e varc’h. E droad kleiz a sankas er stleug. Ul lamm ouesk hag eñ war e zibr. Kemer a reas penn an hent-karr war-du an Hent Bras Real.

War ar maezioù edo sioulder an noz o ren. Ne gleved trouz ebet nemet, stañs-ha-stañs, garm ur gaouenn, harzadenn ur c’hi er pellder ha skoerezh karnoù houarnet ar marc’h war an douar kalet. Ne dizhe ket ar sell gwall-bell en hent-karr, rak, daoust ma ’z oa dizolo an oabl, ne bare ket al loar ha ken uhel e save ar c’hleuzioù goloet a lann, a raden pe a wez-derv a bep tu, ma ’z oa teñval-sac’h ha ma rankas ar marc’heger lezel e loen d’e vleniañ. N’edo ket Garan gant an aon hogen karout a raje bezañ bet muioc’h a frankiz d’e selloù. Petra bennak ma ’z edod er bloavezh seitek kant tri-ugent e c’hoarveze a-wechoù c’hoazh gwalldroioù gant ar veajourien-noz.

Pa zegouezhas war hent bras Lannuon e voe divec’hiet e spered ha lakaat a reas e varc’h da vonet d’an drot. Goude sevel gant grav Sant-Min

e tiskennas bete Roudoù-Anton a-raok kregiñ da bignat adarre war-du al lec'h anvet an Ifern-Bihan.

A-greiz-holl e spontas e varc'h. Ober a reas ur wintadenn ken dic'hortoz ma voe darbet da C'haran bezañ stlapet diwar e zibr. Daou zen a oa sorc'het war-greiz an hent, daou zen bras gwisket e du. Gant unan anezho e oa ur fuzuilh, gant egile ur penn-bazh hag ur gontell vras pe ur gougleze. Paotr e fuzuilh a lammas da gregiñ e rañjenn al loen. Nesaat a reas e genseurt ouzh ar marc'hadour yaouank hag e c'hourc'hemennas dezhañ :

« Diskenn diwar da jav ! Buan ! » Sentiñ a rankas ober. Kerkent e tiframmas egile e yalc'h digantañ. E eurier a yeas gant al laer ivez.

« Ne gavot ket kalz tra em yalc'h, » eme ar marc'heger yaouank. « Ned on ket un den pinvidik, va c'hredit ! Ur marc'hadour paour ned on ken. »

« Serr da c'henoù ! »

Ar forbann a zilasas ar yalc'h hag a furchas enni.

« N'eus ket pemzek skoed enni ! » a lavaras gant fae.

« Lavaret em boa deoc'h ne rajec'h ket un taol-kaer ouzh va laerezh. »

« Peoc'h gant da deod milliget ! Ne roi ket da grediñ dimp n'eus ket arc'hant all ganit. »

« Sell e-barzh seier an dibr, » eme e gomper.

Klask a reas Garan herzel ouzh al laer da dostaat ouzh e varc'h.

« Tan ganit mar grez ur fiñv ! » a c'hourdrouzas ar c'homper en ur eeunañ e fuzuilh war-du ennañ.

« Taol din da vantell. Re gaer eo evit chom war divskoaz ar reder-bro a zo ac'hanout ! »

Dibrennañ a reas Garan ar blouk-arc'hant a zalc'he e vantell-ban c'hell hag he zeurel dezhañ.

Etre keit-se edo paotr e benn-bazh o tennañ eus seier an dibr rolladoù bihan a zanvezioù seiz ha satin, standilhonoù mezher a bep seurt. Troc'hañ a reas gant e gontell ul lêrenn a zalc'he ur c'houfrig ouzh diaraog an dibr. En digeriñ a reas hag e tennas anezhañ lienaj evit ar merc'hed, gouzougennoù, kemzoù ha begoù-milginoù e dantelezh.

« Dal ' ta, » emezañ en ur c'hoarzhin, « bremañ, paotr, e c'hallimp monet da welout merc'hed Trebeurden. Ne vezimp ket degemeret fall ganto pa daolint o selloù war ar fañfarluchoù-mañ ! »

Adlakaat a reas an traoù er c'houfrig, mesk-ha-mesk. Ar pezh a oa bet tennet gantañ eus seier an dibr, a bakas er vantell.

Garan Dreveur a selle ouzh al laeron, nec'het-bras. En em c'houlenn a rae penaos e c'hallje en em dennañ eus an enkadenn-se. Brav e oa dezhañ c'hoazh pan oa bet lezet gantañ e kambr Ostaleri ar Groaz Wenn, an darn vuiañ eus an arc'hant en devoa savet en deizioù a-raok e-ti gwizien e stal-genwerzh. Bepred edo bantet warnezhañ fuzuilh an hini en devoa kroget e rañjenn e varc'h.

« Selaou, marc'hadour, » a riskignas hemañ, « gallout a rez hon trugarekaat. »

« Ho trugarekaat goude ar pezh emaoc'h o paouez ober din ? »